

CANTIC

EVIT

BREURIEZ AR FEIZ.

Var don : *Santes Mari, Mam Doue.*

Pe var don : *Quelven.*

Tud ar broiou pell o c'houlen sicour digant
Breuriez ar Feiz.

C'hui pere so christenien
Ha na glevit-hu quet
Eur c'hri zo leun a anquen,
Euz pevar c'horn ar bed :
Selaouit oll hor peden,
Hor clemou truezuz ;
Selaouit petra c'houlen
Ho preudeur malheüruz.

DISCAN.

Breudeur, ni glev ho clemou
Euz an tu all d'ar mor ;
D'ho mouez, ha d'hoc'h ezomou
Hor c'halon zo digor :
Ni a roio aluzen
Evit sicour ho pro ;
Ni a savo beleyen
Ha deoc'h ni o c'hasso

Christenien a Vreiz-Izel,
 Ho pet truez ouzomp;
 Ar joaüsted eternal,
 An Ee a c'houlennomp :
 Rac ni zo var an douar
 Tud paour hag emzivad ;
 N'anavezomp, c'hui her goar,
 Na Jesus, nag he dad.

Gueich-all, pell euz sclerijen,
 Pell euz lezen Doue,
 Er memez tevalijen
 Ho pro a oa ive :
 Mil bennoz d'an ebestel
 Ho deuz ho quelennet ;
 Grit quement-all, christenien,
 Breman en hon andret.

C'hui breman so evuruz
 P'oc'h euz ar sclerijen
 Euz ar feiz quen precius,
 — Ho pro a zo christen —
 Mæz ar sclerijen gaër-se
 Alfe disparissa
 Ma na zeu ar garante
 En ho touez d'he maga.

M'an deuz Jesus promettet
 Ne ancounac'ho quet
 Eur verennad dour roët
 D'ho preur en he zec'het,

Petra dalvo, christenien,
Ar guennec binniguet
Gant pini da virviquen
Eneou vo prenet.

6

Ah! Doue da rei calon
Ha nerz d'ar missionner,
Joa ha consolation
En he boan ha miser!
Deoc'h ive bennoz Doue,
Deoc'hu oll, christenien,
A ræi gant guir volonte
Ho quennec d'her souten!

7

Deut eta, belec iaouanc,
Quittaït bro, mam ha tad,
Daoust d'an daëlou puill ha stank
A scuill ho taoulagad;
Deut, *saëou-du* Breiz-Izel
Hast hon euz d'ho clevet
O prezeg an Aviel
E bro ar baïanet.

8

E fleuren ho iaouanquiz
Cals ama renq mervel;
Mæz ho ene a c'houniz
Ar vuhez eternal.
Roudou ho zreid binniguet
Chom merquet en hon bro :
Ra zeuio c'hoaz Bretoned
Cals c'hoaz henvel outo!

Tud fidel, a vir galon,
 O velet ho fñaniou,
 Sicourit hor mission,
 Savit deomp ilizou ;
 Digassit ar scól gristen
 Deomp ha d'hor bugale ;
 Ni bedo evit goulen
 Varnoc'h bennoz Doue.

Ha c'hui (*), escop binniguet,
 Ganet e Breiz-Izel,
 Gant ar maro discadet
 E creiz ar broiou pell ;
 Euz ar Baradoz pedit
 Vit Breuriez ar Feiz ;
 Digant Vari goulennit
Ma cresco c'hoaz e Breiz!

(*) An aotrou Pellerin, escop Bibloz, guinidic
 eus a Guemper.

Imprimatur ut in ecclesiis cantetur.

20^a Maii 1864.

† RENATUS, Corisop. Episc.